

Skolig al louarn

Kaset gant : Fañch Jestin & Mikael Kerne gant sikour Naig Jestin

Pal ar rummad « Skolig al louarn »

D'ar re n'o deus ket c'hoant chom azezet evit heuliañ kentelioù a-hed ar sizhun, e vo kinniget mont er-maez eus al lise hag ober baleadennoù tro-dro da Montroulez.

Kinniget e vez dreist-holl d'ar re a zo bet meur a wech e KEAV hag o deus tañvaet meur a rummad dija.

Bravig ez eo bale, eme ar ganaouenn, met digeriñ e(he) spered vo klasket ivez !

Bemdez, a-raok mont kuit e vo graet un tamm kentelig war un tem o tennañ da c'hlad ar c'hontre :

- War dachenn al lennegezh ha skrivagnerien ar vro (Prosper Proux, Charles Rolland, Fañch Gourvil...)
- Pe/hag war dachenn ar glad danvezel (karn Barnenez, kêr vMontroulez...)
- Pe/hag war dachenn an natur
- Pe/hag war dachenn ar yezh a gomzomp

A-hed an devezh e klasko pep hini lakaat e pleustr ar pezh a vo bet desket diouzh ar mintin.

Etre 10 ha 13 km a vo kerzhet bemdez ha ne vo ket degemeret ouzhpenn 12 stajiad d'ar muiañ-tout.

Petra a vo graet ?

- Ur valeadenn bemdez eus 10e mintin betek 4.30 eur goude kreisteiz, war hentoù don ha gwenodennoù plijus ar vro. Da skouer : a-hed bae Montroulez, e-kreiz douaroù Bro-Leon santel, pe Bro Dreger Penn-ar-bed, hag ivez dre straedoù kozh Montroulez.
- Piknik da greisteiz.
- Displegadennoù a vo graet a-hed ar valeadenn diwar-benn an istor, diwar-benn an douaroniezh, diwar-benn traoù a-vremañ, mojennoù, ha kement 'zo.
- A-wechoù e vimp heñchet gant brezhonegerien ouzizie ar vro.
- Ma vefe glav e vefe klasket an disglav : mirdioù, ilizoù kentoc'h... Met ne raio ket glav !

Evit kemer perzh

- Digor d'an holl re a zo **en o aes e brezhoneg** ha tud gouest da gerzhet betek 4 eurvezh.
- Dont gant botoù bale, ur sac'h-kein, dilhad a-enep ar glav (kenkaz...), un tok, koavenn ha lunedoù-heol, ha peadra da gas dour hag ar piknik (ur c'houlourdrenn ha boestoù).
- Ar re a zo ur c'harr-tan ganto a vo degemeret mat tre... Hag ar re all kement-all !

E soñj emaeomp krouiñ ur strollad WhatsApp evit aesaat an darempredoù etre ar stajidi, kas titouroù, ha gelllet pellgomz kenkaz e vefe unan bennak kollet. Ne vo ket rediet an holl da gemer perzh evel-just. N'omp ket gouest da ginnig un arload all ken digor ha ken skignet e-touez an dud.

EVEZHIADENN : Ar stajidi o devo lakaet o anv er rummad “Skolig al louarn” a zisklêr bezañ gouest da chom er rummad-se betek fin ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c’hellint ket kemer perzh er c’hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

Ne vo ket asantet kas loened (chas hag all) da vale gant ar stajidi.

